

160

Güerz  
Composet a neve var sujet ar maleurion êruet en Montroulez,  
gant Tour an Itron Varia ar Vur o coea.  
28 Meurs 1886.

(112)

Var toy Disput entre ar Haro hac an Den demet.

Jesus, güir Vesti an ên ha Roue an douar,  
Bezit ar vadelez da rêi din eus ho cloar,  
Sclêrijen da zisclêry dirac ar Kretonet  
Miraclou ha maleur pere zo êruet.

Itron Vari ar Vur, m'ho ped a wir galon  
Da zispen em speret hac em ompinion,  
Ma ellin disclêria darn eus ar miraclou  
A zo ar brud anê dre bôvar c'horn ar viô.

Er blavez trizec - cant ha c'hoec'h ha tri - ugent  
E pos ar men genta, evit rêi da entent,  
Eus a guder Montroulez d'an oll habitantët,  
Gant an Duc eus a Kreiz Yan - Daou ez ê hanvet.

Gemer a ra eur gouel a doues an oll deizion,  
Gant nombr a Esqibien da renta d'hon Autrou,  
Er bemzec a vis east, hanvet Gouel ar Verchez,  
D'an Itron Vari ar Vur, Patronez Montroulez.

(113)

Evit dicta an deiz ha rêi d'êc'h da entent  
Eo coet en mis meurs, an eizvet vannugent,  
Er bloa mil eiz cant c'hoec'h, dre zeclaration,  
An oll habitantët a grene gant spouron.

N'en dêo qet hep rêson ez int bet spouronet  
Ar bobl ouz e gompren a zo oll neantët.  
Nombr bras demeus a dud zo bet o visita  
An dizurz en deus grêt Tour ar Vur o coea.

Ebars er ru ar Vur, a gleiz, pa zispenner,

Eul lod eus ar mabeur da velet a eller  
 Pehini zo èruet er guet a Vontroulez ;  
 Me c'houlen asistanç ar C'hrist hac ar Verc'hez .

Am Tour a ras da guet , eme ar gristenien ,  
 Gent eguet ma coeas euy teir saludaden .  
 Am Itron Vari ar Vur , en eur memes amzer  
 En dougas d'an douar hep demolissa qer .

(114)

Herves ar preposiou o deus bet prononcet  
 Eus a guet Montroulez an oll habitantet ,  
 E voant oll spouronet o sonjal en pes tu  
 E coeje Tour ar Vur , na var betore ru .

Ma vije coeet an Tour , hac èt ganta 'n e hed ,  
 Assur a dra certen e voa qer revinet ;  
 Mes n'en deveus qet èt passe an drederen  
 Gantàn evit coea d'an douar en eur bern .

Vandro un heur ha qant , herves ma ententan ,  
 Goude creiz-de e voa Tour ar Vur o coean ;  
 En eur memes amzer pèvar den surpronet  
 A ranc souffr ar maro ha bea ecrançet .

Eur buguelic nao bloas en eur memes amzer  
 Pini zo bet coeet ive gant ar maler ,  
 Eus a zindan an dol en a zo bet tennet ,  
 Ha daou dreust varnèan , gant ar C'hrist preservet .

Pa èruas ar bobl evit diampècha ,  
 Eo clevet ar buguel o crial e denna :  
 Pa zòn gant ar Verc'hez hac ar C'hrist preservet ,  
 E c'houlennàn en graç ma vezin savetèt .

(115)

Demp da glasc an derved pere zo diançet ;  
 Ar pèvar den maro a glèvàn zo caret :  
 Emedi o c'horfou entèret en douar ,  
 Ra verzo recevet o eneoù er gloar .

Pennçec ty a veler a rençer da oza ,  
 Pemp anè zo brèvet , ha deg prest da goea ;

162

Emàn eo ar miracl da gompren, Bretonet,  
Hep na zeus eus a dud nemet pèvar lazet!

Itron Vari ar Vur, dèc'h en em adressañ,  
C'houi a ra miraclou demeus ar re gaeràn :  
Bezit ar vadelez da gaout sonj ac'hanon,  
Particulieramant en heur eus va maro.

Grèt e deus miraclou na ouffen get rompri,  
Penos na peguement en andret pep hini.  
Ne antre den er joa anes caout he c'houje,  
Pa zeo hor Mam zantel ha Mam giir Vab Doue.

Pa barti ar sacrist, en heur eus a greiz-de,  
En aris son ar c'hloc'h, custom e voa da ze,  
Oc'h antren er porchet en em gav estonet  
O velet an douar voa eno digoret.

Mont a ras da Di-Gaer, pa velas gementse,  
Ma lavaras d'ar Mèr e colje e vue  
Ma rencje son ar c'hloc'h, e voa 'y Tour dispozet  
Da goea, diouz ar merc en devoa bet quélet. (116)

Ma teujont assambles evit e visita ;  
En a retorn d'ar quèr hep sonjal e netria :  
En instant ma eo bet poset gant e labour,  
E coeas var e dy an tri-c'hart eus an Tour.

Tri estach eus an tri dindannàn zo crevet ;  
En traon demeus ar c'hao en a zo bet cavet.  
An Itron Vari ar Vur e deus en preservet ;  
Dre viracl admirabl e zeo bet savetèt.

Eur buguelic daou vloas, entre divrech e vam,  
Bini zo bet lazet, hac hi leun a estlam,  
O souten he buguel, eur vrec'h dèi zo fraillet,  
Gant he buguel femp bloas e zeo bet savetèt.

Eun Autrou eus a quèr, dre ar ru o tremen,  
Gant ar vein o coea a deuas d'e zupren ;  
Dion veach d'an douar e zeo bet discaret :  
An Itron Vari ar Vur en deus er preservet.

(117) Eur c'here hac e verc'h o daou a zo lazhet :  
 Da dec'hel eus o zy e voent avertisset ;  
 Ober a rejont goap demeus ar rësoniou ,  
 Hac o antëtamant zo bet caus d'o maro .

An hini en deus grët an avertissamant  
 A yas ractal d'ar quër da querc'hat e arc'hant ;  
 Gant ar maleur sivoas e zeo bet qemeret ,  
 Ma rancas chom dindan da vea ecrazel .

Cetu arze an divea zo cavet ,  
 Seitec de goude m'oa ar maleur êruet .  
 Goulennomp evitë digant Salver ar bed  
 Eus a greiz hor c'halon eur plaç er joüitët .

Tostait , christenien demeus a Kreiz-Tzel ,  
 D'ar querc a Montroulez da gaout ar plaç santel ,  
 Hac e recevot calz eus a induljançon ,  
 Goude ho peach hir , en heur eus ho maro .

En ilis Sant Varze e man breman placet  
 Itron Vari ar Vur hac ar C'hrist beniquet :  
 Prest int da obtëni ha da rëi ar pardon  
 D'an nep a c'houlenns eus a greiz e galon .

(118) C'houi oll habitantët eus a querc Montroulez ,  
 Ganec'h-hu emedi ar C'hrist hac ar Verc'hez ;  
 En hoc'h andret eo grët an divea mirac'h ;  
 C'houi rëi ho polontë vit o zrugarecat .

Demp da drugarecat eus a greiz hor c'halon  
 Itron Vari ar Vur , Mam a gompassion ,  
 Ha goulennomp pardon eus ar C'hrist beniquet :  
 Graç demp d'en em velet en pales an Drindet .

Yan ar Guenn .

(Vol. VII, p. 112-118.)  
 strophes non numérotées.